


E brezhoneg evel just !



Bravik ec'h eo bale bale... war velo ! (I)

Abaoe pell ez eus eus ar velo, ar marc'h-houarn evel ma vez lâret a-wechoù ; hag ur marc'h koad e oa da gentañ e gwirionez. Ya, ur marc'h koad evel ur gazeg-vezevenn, met gant div rod, e koad ivez, etre treid an aneval.

Ne oa c'hoazh na barenn-stur na troadikelloù ; neuze, evit lakat anezhañ da vont war-raok e oa ret d'an den pignet war e gein boutañ gant e dreid-eñ. Savet e oa bet gant an Aotrou De Sivrac e fin an XVIIIvet kantved. Skuizhus a-walc'h e tlee bezañ, ha mont war-eeun 'oa d'ober.

Gwellaet e oa bet da gentañ gant an Aotrou Von Drais o lakat ar varenn-stur da dreiñ ; ha goude gant an Aotrou Michaux o ijinañ an troadikelloù, lakat war ar rod a-raok.

An Aotrou Lawson an hini eo a savas ur marc'h-houarn kaset war-raok gant ar rod a-dreñv dre ur chadenn ha troadikelloù e kreiz, evel ma vez graet bremañ.

Kalz a dud a veze gwelet war velo war ar maez betek ar bloavezhioù 1960 pe 1970. Marc'hadmatoc'h oa, un tamm mat, evit an oto. Ur bern tud kozh a veze aezetoc'h dezhe mont gant ar velo e-lec'h ran-kout tremen o « madagaskar » (mat da gas karr l) ha prenañ un oto da vont d'ar foar pe d'ar pardon. Hag evit mont d'an ostaleri 'ta l Riskl ebet da vezañ tapet gant « **paotred Mari Robln** » goude.

Ar pezh zo kalz nebeutoc'h anavezet eo e oa ar gwir gante evit un abeg all. Ya, a soñj deoc'h ivez : betek ar bloavezh 2000, a-hervez, ez



Johnston the First Riding on the Pedestrian Velocipede

Unan eus ar belioù kenta ? : ur varenn-stur, met troadikell na chadenn ebet

ae primoc'h ur velo evit un oto ! Geo, geo, geo, gwir eo, ar skiantourien a lâr se. Met, evel just, ar re-mañ o devez ur stumm fentus da jediñ a-wechoù. Soñjit kentoc'h, ha ma ne gredit ket, kit da c'houlenn gant an Aotrounez Ivan illich, penn bras al luskad « alternatif » er bloavezhioù 1970 ha Jean-Pierre Dupuy prederour war ar skiantoù :

Evit gouzout pegen prim ez a un oto pe ur velo, eo ret kontañ ivez an amzer ho peus ranket labourat evit prenañ pe baeañ an eil pe egile. Ma n'eo ket sañset se, neketa ?

Deomp dezhi neuze : ezhomm zo 15 mn gant un oto d'ober 10 km (da 40 km d'an eur) hag e koust 0,38 € ar c'h-km, ar pezh a ra 3,8 €, mat. O vezañ ma eo 12 € ar gopr-etre dre eur, eo ret d'an den labourat 19 mn d'ober 10 km gant e oto. Ar pezh a ra etre tout : 15 + 19 = 34 mn evit 10 km. Mont a ra neuze an oto da 17,6 km/eur.

Hag ar velo bremañ ? Mard a ar velo da 14 km/eur hag e koust 0,13 € ar c'h-km, hep kontañ ar bannac'h bier, e vuander a dap neuze 12,2 km/eur. Koll eo ar velo

bremañ neuze, met abaoe un dek vloaz bennak nemetken l

Ma n'eo ket gwir ken 'ta ez afe primoc'h ar velo evit an oto bremañ, eo sur a-walc'h abalamour ma eo kresket gopr an dud (a gav deoc'h-hu ?) ha buander an otoioù. Daoust hag-eñ e vefe ret diezel ar velo evit kelo-se ? N'eo ket sur.

Da gentañ n'hall ket un oto mont ken prim a se ordin', e kêr da skouer. Ouzhpenn da se, hon jedadenn a zlefe, evit bezañ skiantel da vat, delc'hen kont eus an « endro », da lâret eo amañ eus pegen ker e koust an otoioù d'ar gevredigezh ivez : ar riskl a wallzarvoudoù, kêrioù didroc'het gant hentoù bras, karterioù trouzus... Ma vez kemeret ar priz sokial-mañ e kont ez a c'hoazh sur a-walc'h ken prim ar velo hag an oto.

Ar re a blij ar velo dezho a oar memes-tra pegen dañjerus e c'hall bezañ mont ha dont etre ar c'hiri-tan hag ar c'hiri-samm war an hentoù bras ha war ar straedoù ivez. Ha petra a dalv ur paourkaezh war e varc'h-houarn

d'un aotrou en e garroñs trouzus.

Koulskoude e vez kavet muioc'h-mui a dud a garfe kemer aliesoc'h o belo da vont d'o labour, d'ar staloù, d'an ostalerioù pe c'hoazh d'an aod e-kerzh an hañv. Kement hag afaniñ ur bannac'h aer vat e-lec'h delc'hen da louzañ anezhañ gant moterioù, ha klask ober un dra bennak enep ar cheñchamant amzer a vez kaozeet kement diwar e benn abaoe ur pennad.

Amañ en hon bro e vez gwelet muioc'h-mui a veloioù war an hentoù. Koulskoude e chom gwall zister o niver e-kichen hini an otoioù ; gwir eo hon hentoù a vez diaez a-walc'h : pignat ha diskenn sonn a reont alies.

(Lennit ar peurrest en niverenn gentañ...)

**Stroilad « kaozeal »
Kreizenn Sevenadurel
Lannuon
kaset en-dro gant Herve
ar Barzh**

Gerioù diaes :

ar marc'h-houarn = ar velo
ur gazeg-mezevenn : un manège (chevaux de bois)
barenn-stur : guidon
troadikell : pédale
paotred Mari Robin : Mari Robin he devoa bet 6 mab, hag holl e oant aet da jañdarm !
abeg : raison
skiantour : (un) scientifique
jediñ : calculer
luskad : mouvement
prederour : (un) philosophe
gopr-etre : salaire moyen
jedadenn : calcul
endro : environnement
kevredigezh : société
gwallzarvoudoù : accidents